


# AN TRAOÙ DA C'HOUZOUT



## Evit dont betek amañ :

- An Hent bras N12-N165
- Porzh-nij Brest Gwipavaz - 25 Km
- Porzh-houarn Sncf Brest - 30 Km
- Kirri-boutin Brest-Plouguerneu
- Porzh Mor Rosko - 30 Km

## An hent e Plouguerneu



06 79 74 06 61 - 02 98 37 13 35

[www.ecomusee-plouguerneau.fr](http://www.ecomusee-plouguerneau.fr)

[contact@ecomusee-plouguerneau.fr](mailto:contact@ecomusee-plouguerneau.fr)


[www.ecomusee-plouguerneau.fr](http://www.ecomusee-plouguerneau.fr)



# KAIER AN ABADENNOU EVIT AR SKOLIOU



MIRDI AR BEZHIN HAG AR VEZHINERIE



**KELC'H 1**  
KLASOÙ MAMM

**KELC'H 2**  
CP-CE1-CE2

**KELC'H 3**  
CM1, CM2, 6<sup>ved</sup>

**KELC'H 4**  
5<sup>ved</sup>, 4<sup>ved</sup>, 3<sup>ved</sup>



Association  
**KARREG HIR**



[www.ecomusee-plouguerneau.fr](http://www.ecomusee-plouguerneau.fr)

## MIRDİ AR BEZHİN HAG AR VEZHINERİEN

An den e-kreiz e vro, setu ar pezh a gavomp pouezhus hag ar pezh a glaskomp diskouez deoc'h e Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien e Plougerne. Diskouez ar pezh a chom c'hoazh en e sav eus an amzer dremenet hag ar pezh a chom e memor an dud. Hag ivez da betra e servijo warc'hoazh...

Leun a draoù a vez kinniget deoc'h da zizoleiñ gant an dud a labour er Mirdi pe ar re a skoazell anezho. Abadennoù a bep seurt a vez aozet evit ar skolioù. Deoc'h-c'hwi da zibab ar pezh a glot ar gwellañ gant oad ar vugale, live ar c'hlas, roll labour an Deskadurezh Stad pe c'hoant ar gelennerien. Amañ e vezo kavet roll an abadennoù a ginnigomp deoc'h.

En Arvor emamp, setu amañ eveljust ez eus anv dreist holl eus ar mor hag ar bezhin. Studiañ ar bezhin, penaos e vez troc'het, ar pezh a vez graet gantañ, penaos implijout anezhañ er boued. Buhez ar vezhinaerien, ar bagoù bezhinañ... Mont da bourmen war an tevennoù pe war ar mor, sellout ouzh skeudennoù kozh pe taolennoù graet gant arzourien ...

Ur gwir blijadur e vezo digemerout ac'hanoc'h amañ evit ober ar pezh ho pezo dibabet ...

Stéphanie Lalet - Renerez

**KELC'H 1**  
KLASOÙ MAMM

**KELC'H 2**  
CP-CE1-CE2

**KELC'H 3**  
CM1, CM2, 6<sup>ved</sup>

**KELC'H 4**  
5<sup>ved</sup>, 4<sup>ved</sup>, 3<sup>ved</sup>

# KELC'H I KLASOÙ MAMM

## DIZOLEIÑ AR PEZH A ZO BEV, AR PEZH N'EO KET HAG AN DAÑVEZ A YA D'OBER ANEZHO

**PAD I EURVEZH 30 DRE 2 EURVEZH  
E BED AR VUHEZ :**

### **Ar bezhin, ur blantenn deuet eus ar mor**

An animatourez a zegemer ar vugale e Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien. Diskouez a ra dezho meur a seurt bezhin hag ar pezh a vez graet ganto. Dac'houde ez eont betek Porz ar C'Horejoù. Eno e vez gwelet ar bezhin adarre, med an taol-mañ bev war an aod. Sellet e vez mat outo ha desket anaout anezho dre o liv, o doare hag o flas er mor.

**PAD I EURVEZH**

### **AN TRAOÙ SAVET GANT AN DUD**

#### **Evit ober war-dro ar bezhin (bagoù, fornioù mein)**

An animatourez a zegemer ar vugale e Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien. Displegañ a ra dezho peseurt micher eo bet hini ar vezhinerien a-hed an amzer. Ober war-dro ar bezhin hirio ha gwechall. An holl a ya dac'houde betek Porz ar C'Horejoù evit sellout ouzh ar bagoù bezhinañ hag ouzh ur forn da zeviñ bezhin.

**PAD I EURVEZH**

### **AN ARVOR TAMM HA TAMM :**

#### **C'Hoarioù bihan evit dizoleiñ bord ar mor**

C'hoarioù bihan a vez graet en Aod Wenn evit deskiñ mond tostoc'h ouzh buhez an aod hag an tevenn. C'Hoari gant traezh bev ha traezh marv, c'hoari gant kregin-mor, implijout ostilhoù a bep seurt, dastum traoù hag ober traoù kaer ganto, traoù ha ne badint ket pell ...

## AR STALIOÙ LABOUR

**PAD I EURVEZH E GALLEG**

### **DIZOLEIÑ AN TRAOÙ BEV HAG AN DAÑVEZ A YA D'OBER ANEZHO : Leor ar Bezhin (pe Bezhinaoueg), penaos ober anezhañ**

An animatourez a gas ar skolidi betek an aod evit dastum bezhin a bep seurt. Diwezhatoc'h, ar vugale a zispartio anezho hervez o stumm hag o liv. Renket e vezint en ul leor pe ur c'haier a vezo dalc'het er c'hlas. Meur a ouenn vezhin a zo !

**PAD I EURVEZH E GALLEG**

### **DIZOLEIÑ AR BEZHIN EN UN DOARE ALL : Tañva ha keginañ**

Gant skoazell an animatourez, ar skolidi a zizolo ar bezhin mat da zrebiñ. Al lagad, ar fri, an dorn, an teod a vez implijet a bep eil. Un tamm boued a vez aozet ha drebet dac'houde. Boued gant sukr (yod laezh gant pioka...) pe boued sall (bara pe kig drailhet gant bezhin).



# KELC'H 2

CP-CE1-CE2

## KOMPREN AR BED

### PAD 1 EURVEZH 30

#### MEMOR AR VRO HAG AN AMZER GOZH : Un droiad e Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien

Ar vugale a vez degemeret er Mirdi. Evit kompren mat petra eo micher ar vezhinerien ha penaos edo araok, e vez diskouezet dezho ostilhoù ha poltriji kozh ha nevez. Selaou a reont ivez ouzh tud enrollet o tisklaeriañ penaos emañ o buhez hirio, ha penaos edo gwechall. Dac'houde ez a an holl betek Porz ar C'Horejoù evit sellout ouzh ar bagou bezhinañ (bagou kozh ha bagou nevez) hag ouzh ar fornioù bezhin war an tevenn.

### PAD 1 EURVEZH 30 DRE 2 EURVEZH

#### KOMPREN AR VUHEZ : Ar bezhin en aod hag ar pezh a vez graet hirio gant ar bezhin

Ar skolidi a deu betek Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien. Disklaeriet e vez dezho penaos eo bet cheñchet micher ar bezhinaer a-hed an amzer hag ar pezh a vez graet gant ar bezhin hirio. Dac'houde e Porz ar C'Horejoù e vezont lakaet da zastum bezhin a bep seurt war an aod. Desket e vez dispartiañ anezho hervez an anv hag ar ouenn.

## EMBREGEREZH- KORF

### PAD 2 EURVEZH

#### MOND WAR VOR GANT BAGOÙ BEZHINAÑ (BAGOÙ KOZH, BAGOÙ NEVEZ PE TRAOU ALL)

Labourat a reomp gant Skol Bagoù dre lien Plougerne evit kinnig d'ar vugale mont war ar mor e-bourzh bagoù-bezhinañ a bep seurt pe kanojoù all...



# KELC'H 2

CP-CE1-CE2

## STALIOÙ LABOUR

### PAD 1 EURVEZH E GALLEG

#### TRESAÑ AN TRAOU

Goude bezañ bet o sellout ouzh ar vezhinaerien o labourat, ar skolidi a zesk tresañ ar pezh o-deus gwelet en ur c'harned. Diskouezet e vez dezho taolenoù ha tresañnoù graet gant arzourien all .



### PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG

#### KOMPREN AR VUHEZ

#### An arz hag ar skiant

#### Sevel Leor ar Bezhin (Ar Vezhinaoueg)

Ar skolidi a ya d'an aod gant animatourez ar Mirdi. Eno e teskont sellout, dastum hag anavezout ar bezhin. Diwezhatoc'h er skol e renkont anezho en ul leor pe ur c'haier. Meur a seurt a zo !



### PAD 2 EURVEZH E GALLEG

#### AR BEZHIN EN UN DOARE ALL :

#### Tañva ha keginañ

Al lagad, ar fri, an dorn, an teod a vez lakaet da labourat evit dispartiañ ar bezhin mat da zrebiñ. Bez ez eus bezhin ruz, bezhin glas, bezhin tev, bezhin tanv, bezhin gant c'hwez kreñv....Ar blaz n'eo ket heñvel ivez eus ur seurt bezhin d'un all. Peseurt re a vez implijet evit keginañ ? Penaos e vez graet ?..... Un tamm boued bennak a vez aozet ganto : boued sall (amann...) pe sukret (yod laezh gant pioka...)



# KELC'H 3

CM1, CM2, 6<sup>ved</sup>

## DESKIÑ MUIOC'H

**PAD 1 EURVEZH 30**

### ISTOR HA DOUARONIEZH

#### Chom en Arvor

#### Bezхинаñ eus 1811 betek hirio

Gant Diskouezadeg vras Mirdi Plougerne e vez gelllet kompren hag heuliañ istor an Arvoriz hag ar vezhinerien abaoe penn kentañ an 19<sup>ved</sup> kantved betek hirio er Vro Bagan hag er Vro Ac'h. War-lerc'h an diskouezadeg, ar gwellañ tra eo mond betek Porz ar C'Horejoù evit sellout ouzh ar bagoù bezhinañ hag ar fornioù da zeviñ ar bezhin.

**PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG**

### AN ISTOR HAG ISTOR AN ARZOÙ KAER

#### Istor ar vezhinerien : testeni ar

#### skeudennoù. Un droiad er Mirdi, poltriji gozh

Meur a dra a vez dalc'het brav er Mirdi : ostilhoù, testenioù dre gomz, testenioù dre skrid. Hag ivez abaoe an 19<sup>ved</sup> kantved, poltriji, taolenoù ha skeudennoù a bep seurt e-lec'h ma vez gwelet an dud oc'h ober war-dro ar bezhin. Nag a draoù a vez desket ganto. Sellomp pizh outo... Ha sellomp mat ivez ouzh ar skeudennoù graet an devezh a hirio...

**PAD 1 EURVEZH 30 DRE 2 EURVEZH**

### SKIANTOÙ HA TEKNOLOGEZHIOÙ

#### Doareoù stank ar vuhez : dizoleiñ ar bezhin

Degemeret e vez ar skolidi e Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien e Plougerne. Dizoleiñ a reont micher ar vezhinerien hag ar pezh a vez graet gant ar bezhin. Ha penaos e veze al labour-se en amzer dremenet.

Dac'houde, e Porz ar C'Horejoù, e vez studiet a dostoc'h ar bezhin a vez troc'het gant ar vezhinerien. Plijus eo gwelet penaos e tiwan hag e kresk ar bezhin en aod araok bezañ kutuilhet. Red eo, avad, derc'hel ul lodenn didroc'h evit an amzer da zond. Ha bremañ e vez klasket ivez lakaat bezhin da boulzañ war gerdin hir er mor.

**PAD 2 EURVEZH**

### EMBREGEREZH-KORF

#### Mond war vor gant bagoù bezhinañ (bagoù kozh, bagoù nevez pe traoù all)

Labourat a reomp gant Skol Bagoù dre lien Plougerne evit kinnig d'ar vugale mont war ar mor e-bourzh bagoù-bezhinañ a bep seurt pe kanojoù all...



# KELC'H 3

CM1, CM2, 6<sup>ved</sup>

## DESKIÑ MUIOC'H

### PAD 1 EURVEZH

#### DESKIÑ AN DROUG HAG AR MAD

**Deskiñ bezañ reizh :**

**ar pezh a vez desket war an tevenn**

Maget e vez an tevenn gant ar bezhin o vreinañ. Evit ma chomfe bev an tevinier e rankomp taoler evezh outo ha derc'hel anezho brav ha dilastez. E chadenn ar vuhez emaint paket etre ar mor hag an dud. Leun a draoù a vez desket war an tevenn.

### PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG

**Deskiñ bezañ reizh :**

**Leve an amzer dremenet**

Dre an hent-troad a-hed ar vri e c'hell ar vugale dizoleiñ an holl leve a zo chomet warlerc'h hon tud kozh : eus amzer an dud kentañ er vro betek bremañ. Mein kozh koulz ha mojennoù ha kredennoù ha zoken c'hoarioù bugale... En ur sellout ouzh ar pezh a vez gwelet endro dezho e c'hell ar skolidi kompren pegen bresk e vez alies al lec'hioù a welomp tro-dro deomp. Un doare eo da zeskiñ dezho taoler evezh ouzh pep tra.

## STALIOÙ LABOUR

### PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG

#### AN ARZ HAG AR SKIANT

**Penaos sevel Leor ar Bezhin**

Ar skolidi a ya war an aod evit dastum a bep seurt bezhin gant skoazell animatourez ar Mirdi. Diwezhatoc'h er skol e teskont lakaat anvioù d'ar pezh a zo bet dastumet. Reñket e vezont en ur vezhinaoueg.

### PAD 2 EURVEZH E GALLEG

#### PLAS AR BEZHIN ER BOUED

**Tañva ha keginañ**

Ar bezhin a vez implijet e meur a zoare : evit mirout, reiñ blaz pe tevaat ar boued. Drebiñ a reomp bezhin hep gouzout deomp. En abadenn-mañ e vez desket d'ar skolidi peseurt blaz e-neus ar bezhin ha penaos e vez implijet er gegin. Daou damm pred a vez aozet ganto, unan sall hag unan dous. Da gentañ, evit lakaat war wel e c'hell ar bezhin tevaat ar boued, e vez aozet un doare yod-laezh hep vioù, gant tammoù bezhin ruz (pioka pe tellesk ruz). Dac'houde evit dizoleiñ blaz dispar ar bezhin e vez aozet ur pred all gant bezhin kriz drailhet.



# KELC'H 4

5<sup>ved</sup>, 4<sup>ved</sup>, 3<sup>ved</sup>

## MONT DONOC'H

### PAD 1 EURVEZH 30 DRE 2 EURVEZH

#### ISTOR HA DOUARONIEZH

##### Istor ha memor

##### Labour ar bezhin eus 1811 betek bremañ.

##### Dastum an eñvorioù

En ur sellout ouzh an traoù dalc'het e Mirdi Plougerne e vez gellet kompren ar pezh eo bet buhez ar vezhinerien abaoe penn kentañ an 19<sup>ved</sup> kantved betek hirio. Eno e vez kavet ostilhoù, skeudenoù ha testenioù dre skrid ha dre gomz. Penaos int bet dastumet ? Kenderc'hel a ra al labour bremañ atav ?

Goude tro ar Mirdi ez a an holl betek Porz ar C'Horejoù evit sellout ouzh ar bagoù bezhinañ hag ar fornioù war an tevenn.

### PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG

#### AN ISTOR HAG ISTOR AN ARZOÙ KAER

##### Ar vezhinerien hag an arz : penaos int gwelet gant an arzourien. Un droidad er Mirdi, poltriji gozh

Ar skolidi a ra tro Mirdi ar Bezhin hag ar Vezhinerien. Sellout a reont ouzh an traoù diskouezet eno . Gwelout a reont peseurt buhez o-deus bet ar vezhinerien gwechall ha bremañ.

E penn diwezhañ an 19<sup>ved</sup> kantved eo bet kroget an arzourien da livañ, tresañ, pe tennañ poltriji ar vezhinerien o labourat. Evit diskouez petra ?

Penaos sellout ouzh an oberennoù-se ha kompren anezho ?

### PAD 2 EURVEZH

#### SKIANTOÙ AR VUHEZ HAG AN DOUAR

##### Dizoleiñ an implijoù bezhin hag embregerezed bezhin e Breizh

Ar skolidi a zo digemeret er Mirdi e Plougerne. Deskiñ a reont penaos vez dastumet ar bezhin d'ar poent-mañ ha penaos e veze graet gwechall. Disklaeriet e vez dezho ar pezh a vez graet gant ar bezhin.

Dac'houde ez a an holl betek Porz ar C'Horejoù. Eno e vez diskouezet dezho peseurt bezhin a vez troc'het gant ar vezhinerien. Meur a seurt a zo.

Ar bezhin a ziwana, a gresk hag a varv en aod. Ha pouezus int e buhez ar mor hag an Arvor ? Penaos ober an eost hep mond re bell ? Doareoù nevez a zo ivez bremañ evit sevel bezhin.

### PAD 1 EURVEZH

#### Dizoleiñ an Tevenn

An tevinier a zo bev. Ar bezhin brein a gustum boueta anezho. UI lodenn int e chadenn ar boued. Red eo derc'hel anezho brao ha naet evel ar bed holl tro-dro. Paket etre ar mor hag an dud ez int aes da ziskar...Setu Perak e rank pep hini taoler evezh outo...

### PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG

#### Ar glad naturel ha sevenadurel

Dizoloet e vez ar vro hag ar sevenadur etre Porz ar C'Horejoù hag an Aod Wenn : peseurt mein ar re mañ ? petra vez gwelet dirazomp ? pelec'h emañ ar reter, ar gornaouog, ar mervent... ? peseurt anv he-deus an aod mañ ? hag ar garreg ahont ?



# KELC'H 4

5<sup>ved</sup> , 4<sup>ved</sup> , 3<sup>ved</sup>

## MONT DONOC'H

**PAD 2 EURVEZH**

### EMBREGEREZH-KORF

**Lavigat war bagoù a c'hiz  
kozh (bagoù bezhina) pe bagoù all**

Labourat a reomp gant Skol bagoù dre lien Plougerne evit kinnig d'ar vugale mond d'ober un droiad war ar mor. Bez e c'hellont mond da lavigat war bagoù bezhinañ a c'hiz kozh pe war bagoù nevesoc'h. Pe c'hoazh morañ en un doare all.....



## STALIOÙ LABOUR

**PAD 1 EURVEZH 30 E GALLEG**

### SKIANTOÙ AR VUHEZ Dielfennañ ar bezhin

Eus a greiz ar bezhin du e vez tennet un dañvez añvet aljinat hag a zo eus kerentiad ar polysaccharid. An dañvez-se e-neus ar galloud da devaat pe da galetaat ar pezh a vez mesket gantañ. Setu perak e vez implijet evit ober leun a draoù : boued , dilhad, paper, louzaouennoù kaer evit ar c'horf, louzaouennoù evit ar yec'hed....  
Gant binviji skiantel , e vez lakaet ar skolidi da dennañ an dañvez-se eus ar bezhin ha d'ober kanetennoù aljinat.

**PAD 2 EURVEZH E GALLEG**

### IMPLIJ AR BEZHIN E BOUED AN DUD Tañva ha keginañ

Ar bezhin a vez implijet evit mirout, reiñ blaz pe tevaat ar boued. Drebiñ a reomp bezhin hep gouzout deomp. En abadenn mañ e vez desket d'ar skolidi peseurt blaz e-neus ar bezhin ha penaos e vez implijet er gegin. Daou damm pred a vez aozet ganto : unan sall hag unan dous.  
Da gentañ, evit diskouez e c'hell ar bezhin tevaat ar boued, e vez graet un doare yod laezh, hep vioù, gant tammoù bezhin ruz (pioka pe tellesk) .  
Dac'houde evit dizoleiñ blaz dispar ar bezhin e vez aozet ur pred all gant tammoù bezhin kriz drailhet.